

Crim braz Maël-Pestivien

GWERZ PIERRE THOMAS

War dou : *Kenteillou ar Verred.*

Me o ped oll kristenien, deus a ligne Adam,
Pehini oa on tad kenta ag Eva oa on mam.
Houi pere so badeet a n'o kreis eur gallon,
Mo ped, en hano Jezuz d'ober attanton.

Evit klevet ar vuez dimeus Pierre Thomas,
Eun den kruel a barbar goassoc'h evit Judas,
Klevet a so allies koms a gals a grimo,
Mes hema he an trista zo arru bars n'hon bro.

Me o ped, o ma Jezuz, ma Zalver souveren,
Roet sklerijen d'am speret, konduet ma fluen,
Evit explika d'ar bobl guir a skler ar c'hrimo
Kals a dud deus o c'hlevet o c'hallon a greno.

Er bloa mil nao c'hant unan, pemzek a vis genver,
Bars en bourk Maël-Pestivien, so arru eur malheur.
Daou bried oa unisset dirak an doll zantel,
Ar garantez en-treze ne ket bet padet pell.

Prest goude oa eurejet Thomas an den impi,
Gant koler a krueldet teue di maldreti.
Neuze dre ali Satan a sonjes hi lasa,
Hag a ra dei eur maro deus ar re gruella.

En noz nefoa groet an torfet, hep pater nag ave,
E war-dro seiz heur hanter, oa et bars ne wele.
Na oa ket vit reposi tentet gant Lucifer,
Diou blac'h iaouañk oa eno a ra testeni skler.

Louise Courriard oa ive eno gant an diou all.
Contant joauz e c'hallon, sonje ket er bed a!
Pe ne arruet en heur a poent mont da gousket,
An diou blac'h ma a sorti bonsoar a deus laret.

Hag ar vam dener neuze araog mont di gouele,
Laka e merc'h ni c'havel, e goad e c'harante.
Neuze hi vont ne gouele, allas na sonje ket,
A oa kichen eur payen an nos se o kousket.

Neuse an tyrant kruel dre nerz an drouk speret,
A so lampet war e goug ag a neus hi mouget,
A dre ali e zrouk Ael kemeras eur gorden,
Ag a redas anezhi raktal en e c'herc'hen,

Ag stagaz anezhi deus eun treust oa enna,
O sonjal vije sonjet dije gret e c'hunan,
Eur c'hrouadur a zouge entre hi daou goste,
A so maro en e vamm, pebes glac'har e ze.

Setu ta fin de zourmant barnet e gant Doue,
Mo ped laret eur bater vit repos e c'hine.
Lucifer, prins an ifern na oa ket c'hoas contant,
A zikour ar c'hriminel d'ober e zantimant.

Eur buguel all e oa c'hoas oajet deus a dri bloa,
Eur pod dous ag agreabl deus ar re vaillanta,
En noas a neus an tennet e maes deus e wele,
Entre daouarn ar malhevrus tremenas e vuez.

Massacret e oa ganta partout gant an tollio,
Sonjet eta kristenien bars ar buguel maro.
Neuse neus kavet enna dour bars n'eur chodouren.
Ag a neus an dastumet ebars a var e ben.

Neuse a neus an koachret eno dindan an doll,
Hep kavet eun tam remors bars ni gallon diroll.
Eur buguel all a oa c'hoas kousket en e gavel,
Hennez so bet preservet deus dorn ar c'hriminel.

Na pe neus gret ar muntrer e grimo exekrabl.
Da beder heur deus ar mintin parti da di e dad.
Pa ne arruet eno e dad neus goulennet :
Petra a so a neve pe n'out te arruet.

Ag e lavaras dean oa netra a nevez,
Me so deut da labourat en pad daou pe dri de.
Neuse ar monstr didrue chomas en ti e dad,
Mes prest goude so guelet krimo abominabl.

Da eis heur deus ar mintin, ebars a memes de,
Eur plac'h iaouank o tremen toul an nor a gleve
Ar buguel oa preservet o krial ni gavel,
A c'hi vonet bars an ti vel mignonnes fidel.

A n'em antren bars an ti a deus bet goulenne! :
Penos ta, Louise Courriard, na nout ket c'hoas savet.
Evel den na respontas, e sellas er gouele,
Ag a welas anezhi bars an extremité.

Pa welas ar gorden ne goug e loskas eur griaden,
Ken oa klevet tro-war-dro gant an amezeien.
O klevet ar c'hri esklam an dud so diredet,
A n'em antren bars an ti o c'hallon so mantret.

O velet Louise Courriard maro en ni gouelle,
Tout a n'oll assistantet gant glachar a voele,
Neuse deus kavet enna ebars eur chodouren,
Eur bugel e bars en dour dastumet var e ben.

O velet e maro kri deus ar vam ag ar mab,
Sonjet eta kristenien difoa oll kallonad,
Drema ractal ar c'hello so kasét dar justis,
Vit dastum ar chriminel da dremen kourdassis.

Mont e ra ar polis ractal da di e dad,
Ag a deus cavet ar muntret a babar en ingrat,
Pe neus gret dar gendarmet e seklaration,
Raktal eo garotet a laket ar prison.

En dez varlerc'h ar beure ar justis so rentet,
Da sek heur deus ar mintin da velet an torfet,
A Pierre Thomas ive enna oa digasset,
Evit ar vaech divesa da velet e bried.

Diskoet e oa dean oll dourmanchou e vab,
A digoret e bried dirag e zaoullagat,
Pe oa cavet ar bugel na oa ket c'hoas ganet,
Ar justis laras dean : den fal sell er feus graet.

Sell aze eur c'hrouadur a c'houlén badeiant,
Ive kalon da bried sell dioute tyrant,
Evit gouelet kementse n'ag o goad a redec,
En den kri a digalon ne oa ket c'hoas touchet.

Laret ras dar peureur gant an air golleret :
Ne ket me neus o laset na ven guillotinet,
Biskoas na meus bet songét c'hober a sort krimo,
Na ven t. . . gant ar bed Doué ma fardono.

Neuse raktal ar c'horfo so laket no c'harchet,
A transportet da illis vit heza interret,
Da der heur goude kreiste oa en interrnamant,
A Thomas va . . . ar blasen a so rentet present.

Evit gouellet e bried e vab vont da douar,
Na strinkias ket da daoulin ar c'hriminel barbar,
Pe narruas kroas Jesus da dremen ni gichen,
Ar gendarm laras deza lem da dok den payen.

Sonjet eta kristenien bars en den malhurus,
Nacket e var e zaoulin d'adori kroas Jesus,
Cement se so vit d'omp oll un exempl triste a bras,
Ne c'heulliom ket ar vuez neus gret Pierre Thomas.

Kar dirak tribunal Doue renkfomp apparisa,
Da renti kont dar barner en traouien Josapha,
Me o ped oll gristenien brema da imita
Da sonjal en disparti a so ama brema.

Louise Courriard ag e mab so laket a no be
A Thomas so ett dar prison da c'hortos ar jure,
A ugen e viz ebrel Thomas so bet galvet
Da tribunal Sant-Briek vit besa condaonet.

Ouspen tregont a desto zo bet vit an after,
Ar wirione d'ar justis o deus lavaret skler,
Pa oa gret ar jujamant gant an dud a lezen,
E oa lennet dirakan e setans pen-da-ben.

Ag evit e recompans dimeus e fallente,
Neus bet al labour fesset en durant e vue,
D'an oad eiz bloa war 'n'uguent a renk brema Thomas,
Kuitaat Kallak e vro gaer a soufr tourmancheu bras.

Gret a neuz bars ne vue krimo bras ag anken,
Mes ma neus pell da veva, rei kals a binijen.
Hema gle besa kentel da gals a briejo
Pere so hep karante a bet ma a vevo.

Ar botret so peurvua kaos da gals a grimo,
Mes ar merc'het neus ive lod dimeus ar vico,
Bevomp oll a union en karantez Doue,
Ag a vemp oll kurunet en Env gant a Aeles.

JEAN KRAVIS.

(Propriété réservée)
